



Kenstrivadeg barn filmoù gant festival “Courts Métrange”

Evit ar gelennerien brezhoneg, saozneg, alamaneg, spagnoleg, ar gelennerien war al lennegezh hag an arzoù, ha kement kelenner zo desachet gant ar sinema.

Gant aozerien ar festival Court Métrange, gouestlet d’ar filmoù-berr iskis ha faltazi, e vez kinniget bep bloaz ur genstrivadeg evit skollajidi ha liseidi Breizh, ha skolidi ar c’hentañ derez zoken. Goude bezañ bet en un abadenn evit ar skolioù e c’hell ar vugale dibab ur film-berr ha skrivañ ur varnadenn e brezhoneg, galleg, alamaneg, saozneg pe spagnoleg.

Daouzek abadenn evit ar skolioù hag atalieroù a vo aozet e-kerzh 11^{vet} festival Court Métrange, e sal an TNB, e Roazhon, etre an 10 hag ar 17 a viz Here.

Evit gouzout hiroc’h : WWW.COURTMETRANGE.EU
 Enskrivadurioù : Cécile Artic, cartic007@gmail.com
 Pgz : 06 88 41 32 25

BTU Kehentiñ Teiryezh e Gwened

Labourat e brezhoneg, digor d’ar bed a-bezh !

Gant ar BTU Kehentiñ Teiryezh e Gwened : brezhoneg, saozneg, galleg.

Muioc’h-mui a embregerezhioù hag a gevredigezhioù a fell dezho kehentiñ en un doare teiryezh.

Stummadur a bep eil e-pad 24 miz, digor d’ar re yaouank ha d’an dud deuet.

Evit gouzout hiroc’h : WWW.IDPCES.FR
btsvannes.rondeaux@free.fr
 Pgz : 06 32 61 10 57



“Henri Rannou, martolod e boutailh” war France 3

Etre kontadenn ha film-bevaat, ar rummad filmoùigoù teir munutenn nevez-mañ a vo skignet gant France 3 adalek an 13 a viz Gwengolo en abadenn Bali Breizh (stumm brezhonek) ha Littoral (stumm galleg).

Dibaoe 40 vloaz emañ Henri Rannou o sevel bigi da lakaat er boutailhoù evit reiñ korf da istorioù mor o deus skoet e spered. Gant e zoare kontañ ha gant harp ar bigi er boutailhoù e sach hon evezh war istorioù mil vrudet e-giz *Moby Dick*, an *Titanic*, ar *Pourquoi-pas* ha mil darvoud all degouezhet e bed ar voraeerien.

Barzhoniezh, bliverezh ha fent evit plijadur an holl.

Sevenet gant Caroline Rubens, kenbroduet gant Vivement Lundi!, France Télévisions ha chadennoù lec’hel Breizh, gant sikour Rannvro Breizh hag ar CNC.

Evit gouzout hiroc’h : <http://FRANCE3-REGIONS.FRANCETVINFO.FR/BRETAGNE/EMISSIONS/FRANCE-3-BREIZH>

Labourzo

Ur benveg dispar zo bet krouet gant tud Ubapar. Labourzo e anv, ul lec’hienn Internet, digor d’an holl, evit strolañ ar c’hinnigoù hag ar goulennoù labour, ur “pôle emploi” brezhonek en ur mod. Renabliñ a ra fichennoù kinnig-labour (postoù brezhonek pe divyezhek) ha fichennoù brezhonegerien hag a zo o klask labour. Ouzhpenn 300 den (implijerien ha klaskerien labour) zo enrollet evit poent.

Evit gouzout hiroc’h : <http://LABOURZO.UBAPAR.ORG>



Sonadegoù gant Soviet Suprem

Strollad sonerezh nevez gant R.Wan (Java) ha Toma (La Caravane Passe), Soviet Suprem a ginnig ur meskaj rap dic’hortoz ha luskoù balkanek, gant fent ouzhpenn.

Sylvester Staline ha John Lenin a aloubo leurenn Run ar Puñs d’ar Sadorn 27 a viz Gwengolo e Kastellin ! Seniñ a raint ivez e Sant-Brieg d’ar 25 a viz Here hag e Brest d’an 13 a viz Kerzu.

